

1

E penn-araok ar chaluter e oa aet Antonio Jimenez da gaout aer fresk, harpet gantañ e zaouarn ouzh portolo ar vag. Beilhet en doa e-pad an noz, dindan ar pont, war an daou vilisian bet gloazet. Graet en doa e seizh gwellañ d'o c'hoñfortiñ, dezho d'en em stagañ ouzh ar vuhez ken na teufe ar mare ma c'hellfe ur mezeg ober war o zro, naetaat ha kempenn ar gloazioù euzhus bet tapet ganto e-kerzh an emgannoù diwezhañ war ar porzh-mor. Touforek an aer dindan ar pont. C'hwezh kreñv ar glaou, mesket gant c'hwezh an dilhadoù gleb ha gant hini an dislonkadennoù a roe doñjer d'an dud bodet e kouc'h ar vag. Lod a vorede, souchet en o bern. Lod all a oa aet da c'hourvez war ar pont. N'en doa ket Antonio serret e zaoulagad.

War sioulaat ez ae talm e galon, bremañ, e penn-araok ar chaluter, met pounner e oa e benn. Tavet an avel a c'hwezhe an deiz a-raok. E takadoù zo e tenne an oabl da liv al laezh diwar restachoù brum skañv. Koazhañ a rae sked ar stered. Tost e oa ar ruzell-veure da zont, d'an deiz-se 21 a viz Here 1937, war ar mor bras, pell diouzh

aodoù gwalarn Bro-Spagn bet kuitaet gant ar chaluter en derc’hent.

E-kreiz pleg-mor Gwaskogn e oant erru, sur a-walc’h, a soñje Antonio. Met ne oa ket evit en asuriñ da vat. Ne oa ket e vicher bezañ martolod. E vicher da zont, rak war e studi edo c’hoazh d’e bemp bloaz warn-ugent, a oa bezañ kelenner. Met, bloaz zo dija, e oa chomet a-sav gant e studioù e kevrenn an istor a-vremañ, e skol-veur Bilbo¹, war aod pleg-mor Bizkaia. Ne chome dezhañ ken nemet echuiñ e dezenn dibenn-studi. Dibabet en doa da benn-studi e dezenn : gwrizioù al luskadoù faskour a ziwanas, e 1920, war ludu ar c’hentañ Brezel-bed. War an dodenn-se, donedigezh Benito Mussolini gant e bagadoù Rochedoù du, e Bro-Italia, kerkent ha fin ar brezel Pevarzek, a vije bet un eienenn dihesk da roiñ korf d’e dezenn. Ha savedigezh Adolf Hitler da führer nemetañ an trede Reich, gant sikour e nazied o rochedoù melen-du, Gestapo hag all, a c’hellfe kas ivez dour da vilin penn-studi Antonio Jimenez.

Ha pa soñje bremañ ar paotr en e zanvez tezenn, e lamme e wad d’e benn. Daoust ha ne oa ket bet-eñ, dres, riñset ivez gant un doare faskouriezh all ? An hini a gasel he reuz, e Bro-Spagn, bloaz hanter a oa. Stlaket en doe an tarzha-kurun d’ar 17 a viz Gouere 1936, pa iriennas jeneraled trubard d’ar Republik, gant Francisco Franco en o fenn, un taol-stad a-enep d’ar gouarnamant republikan staliet e Madrid. Da-geñver dilennadegoù miz C’hwevrer 1936, eo e oa bet lakaet ar gouarnamant-se e penn ar vro war atiz luskadoù politikel an tu kleiz kevredet e-barzh talbenn ar bobl : ar *frente popular*. Setu ma oa bet aze

1 Bilbao e kastilhaneg

un disoc'h dilennadegoù na blije tamm ebet da luskadoù politikel an tu dehoù. Faotañ a rae dezho cheñch penn d'ar vazh.

Dre se ivez, o doa ar jeneraled trubard lakaet leñjionidi an arme kolonial, a oa da neuze e Maroko, da dreuziñ strizh-mor Gibraltar evit dilestrañ en Andaloucia. Sikouret e oant bet evit se gant kirri-nij an Duce Mussolini ha re ar Führer Hitler, rak ma oar ar bleizi en em dagañ, en em skoazellañ a ouzont ivez. Soñj Franco a oa kas an tan betek Madrid, dre seveniñ un taol-stad, ur *pronunciamento*, evel ma vez lâret e Bro-Spagn, a-benn diskar gouarnamant sokialour an tu kleiz. Lakaet e vije en o flas ur gouarnamant broadelour-rik, harpet gant strolladoù politikel an tu dehoù. Ken buan all e teufent a-benn da gas ar Republik d'an traoñ !

Ar pezh a oa, ne oa ket deuet ar vroadelourien emsavet, dilestret en Andaloucia, a-benn da lakaat seziz war Madrid, petra bennak ma oa bet kaset urzh da soudarded gwarnizonoù Bro-Spagn d'en em sevel ivez evit sikour arme Franco. A-vec'h ma oa aet an hanter eus soudarded ar gwarnizonoù a-du gant ar jeneraled trubard. Kouezhet e oa evelato falc'h an Ankoù, lemmet gant maen-higolenn an Diaoul, war chouk Bro-Spagn a-bezh. Gwashañ gwalenn a c'hellfe distrujañ ur vroad e oa, dre ma oa bet tarzhet ur brezel-diabarzh euzhus, gant breudeur o lazhañ breudeur ha familhoù oc'h en em zispenn.

Troc'het e oa bet an arme e daou damm hag ar bobl er memes mod. Diouzh an tu dehoù, strolladoù politikel ar viroulerien a vode en o metoù ar vourc'hizelezh, ar frankizourien, ar roueelourien, izili ar falañsoù, hag ar gloer katolik dre vras war-bouez beleien parrezioù

Bro-Vask. A-enep d'ar viroulerien, ha savet ivez war o elloù, e oa strolladoù politikel an tu kleiz ma kaved en o metoù al luskadoù republikan, sokialour, komunour hag anarkour : ar re Ruz, evel ma veze graet anezho gant ar vroadelourien.

Kerkent ha ma oa bet dilestred lejionidi Franco en Andaloucia, pe douget di gant kirri-nij Mussolini hag Hitler, pennrener ar sokialourien e Madrid ha mestr ar gouarnamant anezhañ, Francisco Largo Caballero, a c'halvas strolladoù an tu kleiz da gas war-raok *emsavadeg ar broleterien*. Lakaet e oa bet war-sav milisoù republikan ha roet e voe armoù dezho. Ar re-mañ a zalc'he mat evit difenn ar gêr-benn, Madrid, hag an toledoù diouzh kostez ar su ha reter Bro-Spagn.

Nebeut-ha-nebeut koulskoude, ha petra bennak m'en doa Bro-Rusia kaset armoù d'ar republikaned, ez eas an tu-gounid gant ar vroadelourien, anvet ivez Frankisted, harpet ma oant gant soudarded, tankoù ha kirri-nij an daou faskour bras, Mussolini hag Hitler. E 1936 dija, e oa aet dindan levezon ar Frankisted kêrioù bras evel Malaga, Sevilla, Granada. Met, dre ne zeuent ket a-benn da gemer Madrid, e tivizas Franco kas an argad ouzh an Asturias ha Bro-Vask e gwalarn ar vro, ha herzel ouzh republikaned ar proviñsoù-se a skoulmañ liammoù gant republikaned Bro-Frañs. Pemp kreñvlec'h a chome c'hoazh, e deroù 1937, dindan levezon republikaned Bro-Spagn : Madrid, Valencia, Barcelona, Saragossa ha Bilbo. Bilbo eo a oa da gouezhañ da gentañ.

Eus Donostia², porzh-mor war aod ar Gipuzkoa, e Bro-Vask, e oa genidik Antonio Jimenez. Yaouank-tre e kollas

2 San-Sebastian e kastilhaneg

e dud. Desavet e oa bet gant gant ur yontr eus Gernika, ur gêr vihan nepell eus Donostia. Met an dizeur a skoas outañ en-dro. Koll a reas ar yontr e vuhez, e miz Ebrel 1937, pa oa bet bombezet ha flastret Gernika gant kirri-nij an nazied. Didud e chome ar paotr yaouank, hep kar na par. Setu pa oa bet galvet ar republikaned da lakaat harz ouzh donedigezh ar Frankisted, en doa Antonio dilezet e studi evit mont da gemer ur fuzuilh ha kartouchennoù digant mestr ar milisoù e Santander. Emgannoù a oa bet da c'houde, dre draoñ ha krec'h menezioù ar vro, *Los Montes Cantabricos*, etre ar republikaned hag ar Frankisted. Met ar re ziwezhañ-mañ, gant lejionidi an arme kolonial en o zouez, a blante ar yenn gant ar republikaned na oant ket soudarded a vicher holl anezho.

D'an 19 a viz Even, 1937, e kouezhas Bilbo dindan arsailh ar Frankisted. Lod eus ar republikaned a c'hellas kemer an tec'h, dre dreuziñ ar Pireneoù, gant ar soñj da gaout repu e Bro-Frañs. Antonio, eñ, hag ar vilisianed a oa gantañ, ne c'helljont ket tec'hout. Stanket e oa outo hent ar reter, hini ar Pireneoù. Ranket o doa kilañ etrezek ar c'hornôg, betek porzhioù-mor Gijón hag Aviles, en *Las Asturias*, war aod ar *Mar Cantabrico*. Eno e vije bet fin ar veaj, ha fin d'o buhez kazi-sur, ma ne vije ket bet eus ar bagoù-pesketa, chaluterien anezho, a oa war o eor er porzhioù-mor.

Kant milisian a oa eus ar gompagnunezh ma oa Antonio enni. War-dec'h e oant rak dibennet e oa bet ar gompagnunezh : lazhet ar c'homandant hag an daou ofiser. Lod eus ar vilisianed e oa o maouez ganto, ha bugale. D'an 20 a viz Here, diouzh ar mintin, ez errujont war ar c'hae e porzh-mor Gijón. Amzer fall. Piladoù glav. Bez' e oa ar Frankisted o tont war o lerc'h. Tostañ bag-

pesketa a weljont a oa hec'h anv : *Huerta*. Ur vag-dredan, ur vateur he siminal vras, gant kaoter ha glaou en he bourzh, a oa eus an *Huerta*, ugent metr hirder dezhi ha tost da dri metr a gal en dour. War ar flot e oa ar chaluterase, ouzh ar stag war e benn-fard, deus kostez ar c'hae. Ne chome war e dro nemet an daou ve kanisian. Kerkent e voe gwelet mestr ar vag o tont d'ar red war ar c'hae, en ur jarneal, kounnaret-ruz. Kaset e voe da sotal hag e lammas ar vilisianed e bourzh an *Huerta*. Kement a bres a oa warno ma kouezhas bugale en dour. Gwazed a splujas d'o saveteiñ. Miguel Gonzalez, kamalad bras da Antonio ha mestr-bag e brud e dregont vloaz, en em lakaas ouzh ar vaol. Rediet e oa bet an daou ve kanisian d'ober war-dro ar gaoter hag ar glaou. Ha tan dezhi ! Bouilhadoù moked diouzh laez ar siminal. Bourbouilh gant ar viñs-tro, kuit an *Huerta*. Poent e oa dezho ! Bez' e oa dres ar Frankisted o tiboukañ e laez plasenn ar porzh. Tennadeg war an dec'hidi. Neuze eo e oa bet gloazet daou republikan war pont an *Huerta*. Eüruzamant ne oa ket a girri-nij gant ar Frankisted. Setu gellet o doa an dec'hidi mont er-maez eus ar porzh-mor. Saveteet !

E penn-araok an *Huerta*, e troe Antonio en e benn darvoudoù an daou zevezh tremenet. A-us da drouz boud, touk-touk-touk, kaoter ar chaluter a zialane dre ar siminal vras, e save bep an amzer kriadennoù ur bugelig bet douget gant e vamm war ar pont. Pet bugel a oa bet savet gant o mammoù er bourzh ? Ne oa ket bet graet ar gont. Gwazed a oa eus ar pep brasañ eus an dec'hidi, milisianed evel Antonio, hag o doa lammet er vag gant o armoù : fuzuilhoù, pistolennoù, greunadennoù... En avantur Doue e oant o vont bremañ. Kerkent e klevas Antonio gervel e anv. E vignon Miguel a oa o tont d'e gaout :

— Te an hini eo, Miguel ! N'emaout ket mui ouzh ar vaol ?

— Kemeret en deus ur martolod all ma flas. Ne oan ket evit herzel ken. Re skuizh.

— Ha da belec'h 'maomp 'vont ?

— Gant ma vefe glaou a-walc'h ganeomp, ez afemp war eeun betek ar C'hab-Kaval, e penn kornôg Breizh. Anavezout a ran pesketaerien eus porzhioù-mor ar Vro-Vigoudenn : Sant-Wenole, Keriti-Penmarc'h hag ar Gelveneg. Tu am boa bet da gejañ ganto gwechall, e ostalerioù porzh-mor Burela, war aodoù Galicia, da vare ar prantadoù pesketa toned pa oan mous e bourzh bag ma zad. Dalc'het em eus soñj eus ur mous a Benmarc'h, 15 vloaz evel don da neuze. Pêr Palud e anv. Hennezh a oa war e studi da vezañ beleg, nemet pa veze an ehan-skol, e-kerzh an hañv, e veze e bourzh bag e dad. War a lâre Pêr din, kroget en doa da zeskiñ spagnoleg er c'hloerdi bihan en e vro peogwir e faote dezhañ bezañ tad-misioner e broioù Suamerika. Petra eo deuet Pêr da vezañ ? N'ouzon ket.

— Ha degemeret e vimp gant tud ar Vro-Vigoudenn, Miguel ?

— Me 'gred, ya. Klevet em eus e oa aet peder bag all etrezek Breizh en devezhioù tremenet.

— Ne 'z afen ket, me, da douiñ ruz emañ ar wirionez-rik ganit. War a zo bet kontet din, e vefe bet harzet gant an archerien c'hall, ha bac'het e kampoù ganto, ar republikaned a ouie mont en tu all d'ar Pireneoù evit saveteiñ o buhez. Ha klevet em eus ivez e vezont kaset d'ar gêr en-dro.

— Kement-se n'eo ket gwir ! Ne ouzout ket-te, e vez ivez e Bro-Frañs, e penn ar Republik, kannaded ur *frente*

popular ? Memes soñjoù politikel, sur a-walc'h, ha re gouarnamant hor bro.

— E tlefe bezañ, ya, Miguel. Met chom a ra an amgred war ma spered memes tra. Ha pet omp e bourzh an *Huerta* ?

— Hervez ar gont diwezhañ, e vefemp c'hwec'h-ugent, gant an daou ve kanisian. Bez' ez eus ivez maouezed ha bugaligoù. Emichañs e talc'ho an daou gamaladed c'hloazet betek penn an treizh. Me, bremañ, ez eo poent din mont d'ober ur pennad-kousk. Ha te, ne vefe ket fall dit ober evel don. Dal, daou ballenn gloan a zo amañ, kas unan ganit. Ar mor a zo plaen. Aes e vo deomp gourvez war ar pont.

Ne oa ket Antonio seizhdaleetoc'h a-benn serriñ e zaoulagad gant ar skuizh ma oa.

2

Unnek eur vintin e oa pa zihunas Antonio. Kousket en doa tost da beder eurvezh, war ar pont, e penn-araok ar chaluter, a-stok ouzh ar portolo. Reut e oa e gein outañ. En em lakaet en e goazez, e selle en-dro dezhañ, tra ma tihune e benn da vat. Ingal e kase ar c'heflusker dre aezhenn e douk-touk-touk unton ha moredus. Ne oa trouz all ebet. Savet e oa koulskoude war ar pont an tri c'hard eus an dec'hidi, lod en o sav hag harpet laez ur c'har ouzh ar portolo, lod all koazezet, difiñv an holl anezho hag, iskisat tra, kaoz ebet ganto. Lavaret e vije bet ul lestrad tasmantoù, sturiet gant an Ankoù, pa ne vije bet eus ar mammoù, pemp anezho, a luskelle o bugaligoù, didrouz. Kas a reas Antonio e sell war an a-dreñv, dreist e skoaz. Aze e oa e gamalad Miguel, en e sav, e balenn gloan e pleg e vrec'h kleiz, e zorn dehoù war beg ar staon. Hag Antonio outañ :

- Pell zo out war-sav, Miguel ?
- N'on ket. Ma falenn gloan a zo atav ganin, sell.
- Bet graet ganeomp un tamm mat a hent, me 'soñj ?
- A live gant kêr Bourdel, a lârfen-me ez omp erru.

— Bourdel a lavarez ! Ha ne vefe ket moaien deomp mont di ?

— Ha dilestrañ war ar c'hae e-kreiz Bourdel, gant milisianed, fuzuilhoù, pistolennoù, greunadennoù hag all ! Ar pellañ ez afemp ar gwellañ e vo, Antonio. Betek Breizh hon eus divizet kas ar vag. Emsavoc'h e vo deomp dilestrañ war aodoù ar Vro-Vigoudenn.

— Ha pegeit e pado c'hoazh ?

— Da'm soñj e tlefemp en em gaout e Penmarc'h war-c'hoazh d'abardaez.

— Ya, met gant ma chomo an amzer.

— Aze emañ an dalc'h, evel ma lârez. Mar deufe an amzer da washaat, n'on ket evit lavarout pegeit e pado an treizh.

Ne gasas ket Antonio pelloc'h ar gaoz war an dodenn-se. Ur gudenn all a oa da zirouestlañ : penaos magañ an dud a oa e bourzh an *Huerta* ? Ne oa ket anv da besketa, ha koll amzer, na da glask pemp troad d'ar maout. Goulennet e voe d'an dec'hidi lakaat e boutin an tamm boued a vije deuet ganto : bara kras, fiez sec'h, pesked sall, bouestoù mir sardin an eoul... Ingalet e voe ar pep nebeud a oa. Ar pep defotañ e oa an dour dous, gant un tonellad hepken e bourzh ar vag. Krennet e voe war lodenn pep hini nemet war hini ar vugaligoù e vije.

Adkemeret en doa Miguel ar vaol, dre ma oa-eñ ar barrekañ war ar sturiañ bagoù hag an hini gouiziekañ war hentoù mor aodoù an Atlantel. Diouzh an abardaez, d'an deiz-se 21 a viz Here, e lavaras Miguel d'e gamalad a oa deuet d'e gaout e kambr ar vaol :

— Taol ur sell war-du ar gwalarn, Antonio.

— Ur vag all o tont ?

— Tamm ebet. Eus an oabl e fell din komz. Ne welez